

Brud Nevez

DEOH... DA RESPONT!
Brud Nevez o rei ar gomz d'he lennerien!

NIJ VA LAPOUSIG
gand Job an IRIEN

DIENEZ
eun danevell gand H. GAUDART

N° 53 - 1982

BRUD NEVEZ

Kelaouenn vrezonég mizieg.

Niverenn 53 – Miz meurzh 1982.

Rener: Andreo Merser.

Sekretour: Jakez Salaun.

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da: BRUD NEVEZ, 6, ru Beaumarchais, 29 200, Brest.

Priz an niverenn-mañ: 10 lur.

Koumanant-bloaz:

- priz ordinal: 60 lur.

koumanant skoazell: azaleg 80 lur.

studieren: 40 lur.

broiou estrañjour: 90 lur.

Eur houmanant-bloaz a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennoù bank a zo da veza kaset war-eeun da: BRUD NEVEZ, 6, ru Beaumarchais, 29 200, Brest.

Ar chekennoù post a zo da veza lakaet war K.R.P. « Brud Nevez », 893-94 P. Roazon.

I.S.S.N.: 0399-7014.

Diskleriet hervez al lezenn: eil trimiziad 1982.

C.P.P.A.P.: nn 34 627.

Ar merour: P.M. Mevel.

Moulet ez-prevez gand BRUD NEVEZ.

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre da adembann eur pennad diwar BRUD NEVEZ heb beza bet an aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e BRUD NEVEZ n'emaint ket da veza lakaet war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset endro ma vez tu.

Embannet e vez BRUD NEVEZ gand skoazell EMGLEO BREIZ.

Taolenn

Jakez Salaun : 1 984?..... 3

Job an Irien : Nij va labousig..... 6

H. Gaudart : Dienez..... 9

Kerlann : Resit trist war sujed eur zoudard yaouank kondaonet d'ar maro en faoz..... 17

Per-Jakez Helias : Yann ar burzudou war e dorchenn II..... 21

J. Goyat : The Cut and Dry Band..... 27

K. Riou : Anoiou-tiegezh Breiz-Uhel..... 28

F.B. : Eur romant polis war an amzer dremenet..... 29

J. Salaun : Ar helaouennoù..... 30

Deoh da respont!..... **pajennoù kreiz**

Digoradur

1 984 ?

Lenn ho-peus bet tro d'ober marteze eul leor hag a zo brudet a-walh, eo **1 984**. Ma 'm-eus soñj mad, e prometer deom er romant-ze eun amzer-da-zond enkreuz a-walh, ma vevferm oll a-benn neuze en eur bed a ziktatouriez : ober a rankfe an eil evel e geneil pe e amezeg, peur-heñvel e vefe an eil ouz egile, evesaet e vefe dalhmad ouz peb unan, hag ... Eur bed unvan a vefe hini **1 984**, ha ne vefe ket ennañ an disterra tamm plas evid an « dis-heñvedigez »...

1 984 eo koulskoude, diouz ar pezh a skriv ar hazetennoù (1) ar bloavezh ma vije digemeret gand ar Parlamant eul lezenn-ziazezh da verka pehini a vo diwar neuze plas ar yezou a gomzer bepred dre hweh korn ar vro, evel ar brezoneg, an euskareg, an oksitaneg hag all... Da nebeuta setu ar pezh a ginnig an **ao. Henri Giordan** en eur raport e-neus skrivet evid e Vinistr, an **ao. Jack Lang** (hag a zo karget euz ar hudennoù a zevenadur er gouarnamant). Abaoe e-neus ar Ministr e-unan roet da gleved e teuje da **Oueliou Etre-keltieg an Orient** a-benn miz east.

Diêz eo barn eur raport tra ken nemed diwar ar pezh o-deus skrivet anezañ ar hazetennoù. War a zeblant, e kinnig koulskoude an **ao. Giordan** ma vije roet eun digoll d'ar sevenadurioù minerozel, e-keñver an droug a zo bet greet dezo abaoe an amzer. Hervezañ eo red d'ar chadennoù radio ha tele (ha dreist-oll da FR3) derhel kont euz goulennou divennerien yezou evel ar brezoneg. En deskadurezh, e rank ivez beza dalhet kont en doare strisa, emezañ, euz yez ar vugale. Med arabad e vije evid se lezel a-gostez an ezommoù war dachenn ar grouidigezh, ar skigna, hag an embann. Kinnig a ra neuze an **ao. Giordan** ma vije digemeret - a-benn an nevez-amzer 1984 - eul lezenn koulz ha reolennoù resiz hag eur budjed, da zigori braz an nor d'ar yezou bihan.

Hervez klevet, e-nije **Ministr an Deskadurez** goulennet diouz e du eur raport all war ar pezh a zo da veza greet war e dachenn e-keñver ar brezoneg, hag eo abalamour da ze eo ez eus bet greet er miziou tremenet eun enklask en oll skolioù Breiz d'anaoud an ezommoù kelennadurez ar yez. Heb gortoz ken e vo echu ar raport all-ze, e-neus goulennet sindikad ar gelennerien **F.E.N.** 200 plas kelennerien azaleg digoradur ar skolioù e miz-gwengolo da zond, kement hag ober eur hammed kenta. Keleennadurez ar brezoneg, eme ar sindikad, n'ema ket da veza lezet a-gostez, nag er-mêz euz euriou-labour reiz ar gelennerien hag ar skolidi.

War a zeblant, avad, n'eus raport ebed en hent war dachenn ar **zelled ha klevet** ha ne zeblant ket e vije kalz a bres diouz kostez an **ao. Filliond** d'ober tra pe dra a-feson evid ar brezoneg. Pezavare e teuy neuze an disterra cheñchamant war dachenn ar radio hag an tele? Ha red e vo gortoz ken e vije votet eul lezenn e 1984?

E gwirionez, dre deir gwech eo e vefe dleet rei a-benn ar fin eun diskoulm da gudenn ar brezoneg er vro-mañ :

- dioustu eo e rank beza kemennet reolennoù nevez : an nevezentiou emañ an oll o hedal. A-walh a ginnigou a zo bet greet evid pezh a zell an deskadurez, ar radio hag an tele : ra vo laket en implij an abreta ar gwella ar re simpla hag ar re esa euz ar hini-gou-ze. M'ema **ar hemm war-wel**, diouz ar pezh a skrive **Emgleo Breiz** ar miz tremenet, gwel a ze.

- med digemer eul lezenn a ranker ober, pelloh. Pa zoñjer n'eus lezenn ebed nemed an hini a zo war ano **Deixonne** o tisklêria pehini eo stad ofisiel ar brezoneg, eo tremen-poent cheñch honnez. Marteze avad ne vije ket red gortoz daou vloaz all - beteg an nevez-amzer 1984 - da lakaad eun danvez-lezenn war roll-labour Kambr an Deputeed?

- da heul al lezenn, e rankje beza digemeret ivez eur plañ war eun nebeud bloaveziou, hag a verkfe resiz petra vije d'ober ha gand peseurt arhant. Plañoù a zaver a-walh war dachenn an ekonomiez, hag evid gwir, euz plañoù evid ar brezoneg ez eus bet komzet e-pad ar miziou tremenet, e meur a feson. Ar menoz euz eur plañ evid ar yezou bihan a gaved dija en danvez-lezenn a oa bet sinet gand an deputeed socialist, **L. ar Peñseg** en o fenn, a-raog na deujent da gemer penn an aferiou. Evel just, n'eo ket e Pariz hepken, e vije eur seurt plañ da veza digemeret : ar rannvro (dreist-oll ma roer dezi kalz muioh a halloud diwar vremañ) eo a rankfe kaoud ar plañ da heulia.

Reolennoù nevez dioustu. Eul lezenn an abreta ar gwella. Eur plañ o vond da heul al lezenn. Setu aze an tri boent e-neus ar brezoneg ar brasa ezomm anezo. Ha n'eo nemed en eur zeveni anezo o-zri eo e hello beza renket da vad kudenn ar yez.

J. S.
D'an 12 a viz ebrl.

(1) Gweled Ouest-France an 11 a viz meur.

Da zond er-mêz en devezioù-mañ :

Mikael MADEG

**Leor Lesanoù Leon
Who's not who**

ha piou a zo!

Saig an avu.
an uzin botin.
Tu pe du.
Ivonig an durzunell.
Mari an archer.
Mari bleud.
Bloum.
Trafiker kezeg.
Traou mad.
Troid plad.
Boutou berr.
Toull izel.

Priz : 20 lur.

Tougn.
Buzug.
Taol warni.
Kastapaku.
Kaz koad.
Kelornig.
Keuneud.
Serpant.
Seur.
Fas du.
Fars gwiniz.

NIJ VA LABOUSIG

Evid ar vugale

Kouezet eo al labous-mor
'N eun tól-kont war an tréz
Kouezet eo al labous-mor
'Vel eur mên en on touez.

Diskan:

Nij va labousig
war-zu an heol
Nij va labousig
war-zu ar peoh
Nij a-denn askell
Warhoaz vo brao.

Gwall-glañv eo va labous-mor
Eur plas 'n-eus 'barz va zi
Gwall-glañv eo va labous-tor
Maget vo ganeom-ni.

Pare ray va labous-mor
'Kreiz ar joa 'kreiz ar peoh
Sevel ray va labous-tor
Karet eo gand an oll.

Laouen eo va labous-mor
Seder eo, yaouank-flamm
Laouen eo va labous-mor
'Vel babig gand e vamm.

Nijal ray va labous-mor
Uhel-tre beteg pell
Tebet eo va labous-mor
Askell wenn, èt da bell.

Job an Irien.

Prest e oa ar ganaouenn-mañ da veza moulet ganeom, p'eo bet kanet en Oriant, evid Kan ar Bobl gand ar strollad Awen euz Brest : talvezet he-deus dezañ gonid ar priz Jef ar Penven kinniget gand Servij an Abadennou Brezoneg e FR3. Ar zonerez a zo bet savet gand Per Yves Moign.

Embannet eo bet ar ganaouenn da genta war Ero Nevez, kelaouenn bedagogel ar Bleun Brug. Ero Nevez, 5, ru Francis Jammes, Brest).

Disheñvel eo an ton embannet war Ero Nevez, savet ma'z eo bet gand René Abjean. Evid bugale vihan eo hemañ, evid bugale vrasoh eo hini Per Yves Moign.

LEOR AR MIZ

Per TREPOS

Enquêtes
sur le
vocabulaire breton
de la ferme

Studiou brezoneg

Eil moulladur

20 lur (250 g)

PAOTR TROURE

MOJENNOU

20 lur (200g)

A. MERSER

RIMADELLOU
ha

DIVINADELLOU

20 lur (150g)

DIENEZ

Erruet e hanter ar zao, war an takad kompez, e harpas Marjan he harigellad raden, evid diskuiza eun tammig.

Sevel a reas he hein en eur harmi.

E-pad oll an abardaez he-doa labouret stard heb diblega koulz lavared he horv war he fegad gwarem en traoñ, da zastum raden evid ober gouzer d'he loen.

Troha gand ar falz, bernia ar garigell, pignad ganti - ped gwech 'ta? - ar wenojenn serz, beteg he zi, du-ze en neh, war beg an duchenn... erfin e oa he beaj diweza, hag an **Hin zu** he-defe henoz eur gouzer fresk ha rouz, leun c'hoaz gand c'hweziou mezvuz a viz Here oh echui...

C'hwezet he-doa ha brevet he horv heb paouez, ha bremañ e oa kouezet ar skuizder en he divesker; eet e oa berr heh anal, ha santoud a reas eur pistig o pika he hostez. N'he-doa ket bet c'hoant goulenn digand heh amezeien da zond da charread he gouzer dezi; ne felle ket da Varjan goulenn sikour pa veze moyenn d'ober a-hend-all ha neuze boazet e veze abaoe pemp ploaz d'ober alies a ma halle, peb tra he-unan.

Edo an noz war-bouez koueza.

En draonienn e save goustadig ar vrumenn, ha dija ne veze damwelet nag ar stêr etre he riblou haleg nag ar pontig koad bezo; draillennou a latar a spege ouz beg ar pupli; buan evel eur vantell ramz en em ledfe ar vrumenn etre ar roziou, ha touchant e vefe goloet pennou uhel ar pupli, brouskoajou melen Roh, hag ar gwanmier rouz...

Marjan a skrijas:

«Bremaig e vo ar goañv!»

Larit 'ta, stard a-walh e vez d'an den beva e-unan-penn e-pad an amzer v Rao; eüruzamant e hall labouriou an hañv lakaad da ankounac'haad ar zoñjou fall. Med pa'z erru an deveziou du, an nozveziou hir, ar yenijenn, ar glaoaj hag ar barr-amzer, pa gouez war ho chouk ar skuizder hag a-wechou ar hleñvejou... penaoz kaoud kalon da zerhel penn d'an dizesper?

Marjan a jomas nehet, pell amzer, he daoulagad goull, o vaga soñjezennoù enkrezet.

« Den, den ebed evid soursial diouzin », a huanadas.

Neuze e hijas he diskoaz, e skopas e palvou he daouarn, e krogas e brehiou he harrigell, hag e vountas gand oll he nerz war he hargad evid pignad ar zao diweza beteg he zi.

Gand beg he forh e ledas hag e kempennas ar raden war ar hraou; an deliou dantelezet a drouze dindan he faziou, hag eur hwez vad gouez a zave euz ar gouzer a-boan sehet...

Neuze ez eas e-mêz ar hraou hag e hopas d'he loen o peuri er parkig karrez a-dreñv al liorz:

« Beuch! beuch! Ale 'n Hin Zu ! D'ho loñch! »

An « Hin Zu » a zeue war he fouez en eur dakennad haq en eur foeta gand he lost he hostezennoù ront. Marjan a stagas anezi ouz ar chadenn peget er voger hag ez eas da glask eur vriad korzennoù ed-Turki hag eur vozad deliou beterabez.

« Ale ! Chomit reiz, ma loen. »

Gand evez e walhas tez an Hin Zu, e skoras ar zaill, eh azezas war ar skaon, hag e krogas da horo.

Ar peoh a rene er hraou klouar. Ne veze klevet nemed trouzig flour hag eeun al lèz o strinka e foñs ar zaill, ha karvanoù ar vuoh o chaqellad he deliou... Ken skuiz en em gave Marjan ma leze da vond a-wechou he zal ouz kostezenn al loen, hag hemañ a verke e zouez en eur fiñval e baoiou.

« Peoh, 'n Hin Zu! Chomit reiz 'ta! N'emaoh ket o vond da strewi ma zaillad din, 'michañs! »

—Sell! C'hoaz! Mil malloz... Med em on o poueza butun! Ne vin ket pell d'en em baka em loñch he noz! Hao! ma hein paour! 'tra rin 'benn arhoaz ma ne vin ket gouest da zével deuz ma gwele? An diodez ahanon! Pa zoñjan e-nefe Job Penfrad charreet ma raden din en eur wechad! Ha 'tra e-nefe koustet din? Netra! A med! Me 'gar paea ar pez a zlean... paët am-befe gand eun

hanter-zevezad tenna beterabez, ya sur, med evel just, n'e-nefe ket gallet 'n em vired da rei din a-walh c'hoaz evid maga 'n Hin Zu e-pad ar goañv...»

Orgouill? mez? elevez? izelegez?

Abaoe maro he gwaz pemp ploaz 'oa, forset da veva heh-unan-penn, he-doa esaët Marjan ober peb tra ar muia ma halle heb sikour. Koulskoude e veze aliez kinniget dezi gand heh amezeien dosta, re Benfrad, rei eun taol dom dezi. Beteg breman he-doa gallet derhel penn he-unan, med goustadig e kroge an anken enni abaoe ma sante ar gozni hag ar poaniou o pega en he horv hag en heh ene.

Ne oa jamez bet hardiz; lent e oa kentoh. Ha bremañ, abaoe maro mezuz he gwaz, eun anken vantruz a vire outi da glask kompagnunez heh amezeien.

Skrija ' reas Marjan en eur vemori er mintinvez hañv-ze.

Joz ne oa ket en e wele. Abaoe e retred euz ar veill-baper, e save abred evid mond da « charchial », pe gentoh da vignia. Re sklav e-noa en em zantet en e labour e-pad daou-ugent vloaz hag ouspenn zoken, ha neuze bremañ lar 'ta, e kemere e frankiz. Ne zoursie ket euz labour an douar nemed evid arad, charread hag an oll labouriou re denn evid eur vaouezig treud evel Marjan.

N'he-doa ket greet van anezi dirag ar gwele digor. Debret he lein ha distabezet an daol, ez eas er-mêz. Hi a vountas war dor ar hrignol evid tapoud foenn d'he loen, hag a laoskas eur griadenn terrupl en eur weled he den krouget, e ziouhar o tañsal goustadig a-uz d'ar bern foenn.

Gwall-huñvre. Biken ne hallo dizoñjal. Redet he-deus er-mêz, ha hopet da derri he mouez hag he halon. War-lerh... Chomet eo en he spered, skeudennoù trubuillet, Job Penfrad o tistaga ar horv; an dud endro dezi oh èsea he frealzi. Eur vaouez o houlenn digand ar person interi, daoust d'e behed, an den en douar benniget, hag o vallozi war an den santel p'e-neus laret « Nann » krenn! E vez n'e-neus ket a groaz, med plantet he-deus Marjan beuz warnañ, — hag ar beuz e-neus stumm eur groaz —, ha pa ne vez ket re skuiz e tap-hi he marh-houarn hag e kas bokidi a beb seurt evid lakaad war ar bez; hag e ouel didrouz, en eur zoñjal : « O ma den paour, 'tra ho-peus greet? Perag? Perag ho-peus lezet ahanon ma-unan? »

Dao eo kenderhel neketa? Ha neuze e teue he houraj dezi a-darre. Hag e vreve he horv war he douar treud, gwiskad moan war roh kaled.

Goude he fred, en em daole war he gwele hag e kouske e-giz eur vaill beteg seiz eur. Koulskoude abaoe eun nebeud miziou, e veze trubillet he housk gand huñvreoù. Terrupl e oant pa'z adwele korv he gwaz istribillet diouz ar framm; med aliez ne jome en he zoñj nemed traou iskiz; en em weled a ree ivez oh aoza pod-merenn he gwaz, pe o kempenn e « voursou » (e yalhou) evid mond da vigria e-pad eun nozvez bennag; med aliesoh c'hoaz e wele skeudenn vistr Gwendal he niz-bihan, deuet e-pad an daou viz vakañs qanto. (paotr he nizez nemeti, hag a oa o chom bremañ e Bourdel), o heulia evel eur hi fur, seuliou Joz. A-wechou en he huñvre, e ouele Gwendal « me fell din chom gand ma zonton, me 'zo d'am zonton, me jomo atao ganeoh ho-taou, peogwir on ho fillor. » An dra-ze a oa poaniuz evid Marjan. Sur en em gave an hini bihan-ze en e vleud ganto; med jamez n'he-doa ijinet e oa ken stag outo ha biskoaz e gwir, n'e-noa gouelet ar paotr dirazo evid mond kuit. Souezuz, an huñvre-ze, hennez dreist-oll, a zeue aliez da hoari ganti e-pad he housk.

Sioul e oa ar hraou; a-veh luziet gand koroll foll ar helien diweza ha ne ehanent ket da vouboual o maro; hag eur wech c'hoaz Marjan a stokas he fenn ouz kostezenn ar vuoh; homañ, hegaset, a fiñvas he fao hag a strewas ar zailad.

« O mil malloz! 'tra 'zo o hoari gand al loen gagn-mañ! Strewet ma lèz! Lomaj! Ha 'tra 'ran gand peza chom e foñs ar zail?»

Marjan, skorjet, a skoas gand he dom war gein al loen, hag a zistaolas dezañ eun taol botez war e har. Ar vuoh souezet, a zelle ouz Marjan gand he daoulagad flour leun a dristidigez. Marjan a dapas ar zail, a zerras dor ar hraou, hag atao ourzet, a zeuas e-barz he zi teñval en eur hrozmolad. Skarza 'reas al lèz deuz ar zail en eur skudell.

« An Hin Zu kaoh! just evidon kaoud eur bannah soubenn lèz! hag a-benn arhoaz netra 'bed ba ma hafe!»

A-raog mond da drohi raden, he-doa elumet an tan war an oaled. Ha bremañ, eun dra all da lakaad anezi da feuka : maro an tan! pas van a luhed eur hlaouenn-veo bennag.

Dao oa 'ta mond endro beteg ar hraou da glask briñsad ha keuneud ha bremañ e koueze ar glao, goustadig hag ingal. Goude an domnder paket en abardaez, e riskle Marjan da da-poud eur horvad-anoued en he dillad skañv. He dom a grene e-pad ma'h èsae strakal an elumetezenn war ar journal. « Ne bego ket an tan milliget-se 'ta. » Med erfin e savas eur flamm sklèr! Ar briñsad a stlake, ha bremaig e oa sklèrijennet ar gam-brig ha tommet gand an tan braz. Marjan a lakaas ar gastolodenad lèz war an trebez hag a jomas da ziwall anezi. Gouest e oa c'hoaz al lèz da zond en tan! ha petra neuze he-defe da garga he bouellou? eur zoubenn an tri zraig? Eun tamm bara kraz? Troha 'reas tammou bara moan hag e skarzas al lèz bervet warno. Hag eh azezas en eur huanada erfin gand ar blijadur. Kared 'ree soubenn al lèz, he hoan bemdez e veze koulz lavared. Kared 'ree ar blaz med ivez c'hwez dous ar moged gwenn a zave beteg he fronellou. Neuze e tapas eun aval, hag e soñjas: « Gwelet am-eus mesper e gwezennig ar roz; dao vo din dastum anezo a-raog m'o-do marmouzed an Neh plantet o hrapinou enno... hag ar histin! leun eo gwez ar Roh! Ne vo ket dao chom da huñvreal... touchant e vo vakañsou kala-goañv, hag e teuio eur vandennad lakezed da ziskara anezo. »

Evel-se e soñje Marjan. Aliez e prege dezi heh-unan. A-wechou ivez e tistage eur ganaouenn goz, med be yee ket pell ganti rag aon e kemere o kleved he mouezig trist o tassion er gambr.

Galloud a ree mond da gousked. Med da gousked da zeiz eur hanter? Lennet he-doa he chournal e-pad he merenn.

A! ma vefe unan bennag hag a zeufe da zerhel kompagnunez dezi. Med piou? Ha neuze, an dud ne garont ket bale d'an noz dindan ar glao.

« Gwendal, Gwendalig ma labousig. C'hweh vloaz 'zo n'am-eus ket gwelet ma nizig. Eur paotrig didrouz, seven, fur, eun èlig. Hag atao war zeuliou Joz. Pa zoñjan! Joz, Joz ken penneg, ken ourz, ha ne gare ket tud endro dezañ! hag a gase partoud gantañ ar paotrig-ze! O-daou int bet, ped nozvez? da lakaad « boursou » war an toullou-lapined. Amzer dudiuz! Amzer re verr!» Me 'zeuio adarre a-benn vakañsou all.» Del! Da Vourdel ez int eet; eul lizer, daou lizer, eur gartenn bloavez mad, ha setu toud. Petra 'zo digouezet? Me 'zo sur e kare ar paotr-ze ahanom, marteze dreist e dud; ya marteze ar re-mañ o-deus maget gwarizi warnom dre-benn an dra-ze? Marteze ne welin mui biken ma Gwendalig?»

Goude e oa eet kuit Gwendal, Joz, digaoz a-walh dija, a zeuas evel mud. Marjan a verze aliez e zaoulagad warni, o heulia oll he jestrou; betek kaoud aon dioutañ memez, rag e veze ar zell-ze leun a gasoni. « Petra e-neus? Petra 'm-eus greet dezañ? » Biken ne oa bet a-raog tabut etrezo; o hent a oa bet sioul, eeun ha dilufr. Nebeud a zarvoudou a oa digouezet en o buhez.

Neuze perag, goude vakañsou Gwendal e oa kroget Joz da cheñch en he heñver? Ha kroget e oa ivez da eva, eñ hag a oa bet e-pad oll e vuhez ken yen e-keñver ar boeson? - evel iust e veze tomm e fri ha ront e votou eur wech an amzer, da skwer, da bardon Sant-Yann, ha da friko « La Classe », med an dra-ze sur a oa nebeud a dra! O ma Doue, penaoz e halle eun den cheñchal e-giz-se ken buan! Eüruzamant e oa deuet e retred, a-hend-all o-defe trenket an traou en uzin! « Eur pemoh! Deuet e oa mod eur pemoh louz! ha flær li gantañ! Hag e zell foñgn! Ne oa ket dre ma faot koulskoude m'e-noa kuitaet Gwendal ahanom. Hag ar paotr-ze ne oa ket deom memestra! ar vuhez am-eus paseet neuze gand an toull-li-ze! O ma Doue! Ne lare mui netra, ne brege mui ouzin, nemed d'an nozvez-se... »

En nozvez-se Marjan a oa o hortoz he gwaz, eet da ruillal piou oar e peleh; erruet en eur vralla evel boaz, e oa eet da azeza dirag e asied hag e oa kroget en eur grenn da lonka e zoubenn gand trouz, an dra a lakae Marjan da gounnar. Teurel 'ree warni beb an amzer, e zell du, ha Marjan en em zante diéz... Hag a-greiz-oll ar mezhvier a vountas e loa ouz ar speurenn hag a grias d'e wreg : « N'ho-peus ket iamez gallet kaoud eur bugel, gwezenn zeh! Sell diouti! N'e-neus ket nemed askom diouti! Seh ha treud, mod eun tamm koad brein! Petra ho-peus ba ho korv, 'ta? » Hag e-pad ma chome skoet Marjan, en em daolas Joz war e wele hag e komañsas dioustu da zirohal mod eur broh. An daerou a ruille ingal war dioujod Marjan. Pebez poan-galon! Ne hellas kousked berad. « Perag tamall anezi? Gouzoud a reer bremañ e hall boud faot ar gwaz kement ha faot ar vaouez! ha jamez a-raog n'e-neus greet van ma vanke eur bugel dezañ! eur wech zoken, - pell 'zo - ken pell 'zo? e-noa laret, - ha nag e ouele-hi neuze gwechall ar paour-kéz maouez - « ni 'zo brao on-daou, Marjan, na gavit ket diéz, heb marmouz ebed etre on divesker! Ha c'hwi oar, ar vugale vez dizoursi e-keñver o zud pa vezont deuet braz. »

Daoust hag e-noa dalhet Joz soñj euz e gorvad a gounnar? Souezusa tra, ne eve koulz lared mui, hag e teue da veza he-garad adarre.

Hag eur miz goude, en eur zigeri dor ar hrignol...

Abaoe pell 'zo he-doa Marjan distabezet an daol, skatet he skudell, ha chom a ree, azezet war mên-kom an oaled, d'en em domma ha da deural en he zoñjezennoù trist.

Bremaig e vo koz, bremaig ne vo ket gouest da zewel he harri-gell... Piou 'zoursio diouti? Penaoz beva heh-unan en he zi? Dao 'vefe marteze skriva da Vourdel da houlen... da houlenn petra 'ta? Daoust hag e vefe kemeret e Ti-ar-re-Goz? Dao 'vo gweled an dra-ze ivez... Hag he zi pa vo deuet an eur dezi da guitaad ar bed-mañ? Da biou ez afe gwelloc'h nemed da Wendal? Ya, eun deiz tost e welo eun noter evid an afer-ze; dao vo dezi renka he aferiou.

Marjan en em gave gwelloc'h; eun taol-lagad d'an orolach: eiz eur a-boan; eun taol-lagad en diavéz: ne goueze nemed eur glaoig tano... « Gand ma felerinnenn e vo mad-tre ». Elumi 'reas al lamp-tempest. Tenna 'reas an nor war he lerb heb he frenna hag e tapas an hent ledan riblet a wez-ivin, a gase da feurm re Benfrad. Marjan he-doa c'hoant boud e kompagnunez.

Bremañ e hede moger ar werjez. Trei 'reas kom ar hraou-marh hag e treuzas ar porz; ar hi a zeuas e-mêz euz e loñch en eur hija e lost. Gweled 'reas, dre ar prenestr sklêrijennet, ar familh ouz an daol, o tebri hag o flepi; an hini goz, seizet he divesker, a oa e-tal an tan, en he hador-vreh, eur skudellad soubenn war he barlenn. Ar vugale a hoarze, hag a gonte o fourmenadennoù hir e traonienn Gergoad evid kaoud kistin: « Re mellou, ma Doue! » Evel-se, goude o hoan, e rafe ar familh eur veilladeg-kistin.

A-greiz-oll, war an treuzou, e chome Marjan heb fiñval. Koulskoude ken èz e oa digeri an nor, skoi war ar speurenn, ha dond er sklêrijenn en eur lavared: « Nozvad deoh, tud an ti! Emaoh gwelloc'h amañ eged er-mêz. Ha c'hwez ar histin o poaza a zeue betek toull dor ma zi! ». Oll e c'hoarzfent, ha neuze e vefe greet plas dezi ouz an daol, ha dao adarre war ar gaoz. Med, souden, en em zante abaf; sur e komprenfe an dud-ze en em gave Marjan klañv gand re a zigenvez... hag o-defe truez outi. Truez! A nann!

Buan e troas he zeulioù, ha beg he botez a luzias e kom an treuzou. Redeg a reas dre ar porz, he hein pleget. Ar hi, direnket, a harzas en eur denna war e jadenn. A-veh m'he-doa paseet

ar hraou, kuzet e skeud ar voger, e welas eur gwaz e sklérjenn an nor digoret frank, hag e klevas eur vouez o hopal: « Peoh, Azor! Piou 'zo aze? Deuit er goulou 'ta!» An den a reas eun nebeud a baziou er porz, a hortozas eur pennadig-amzer, ha neuze ez eas adarre en ti, hag e prennas an nor.

An daerou a ruille war bizaj Marjan e-pad ma tistroe d'ar gêr. Ar glao a goueze ingal, hag e trouze e virou war ar gwez-ivin braz. Skrija 'reas Marjan en he felerinn, hag e santas endro ar pistig en he hostez. Pa zeuas e-barz he zi, e oa maro an tan. Oll heñ izili a grene, hag ar hwezenn a sklase he zal. En em astenn a reas war he gwele, hag e tennas al liñcheriou hag ar goloennou beteg he chik, med netra d'ober! ne halle he horv koz adkavoud eun tamm a domnder.

N'oueze ket hag e oa dihun, oh huñvreal, pe oh alteri.

Hi 'oa mamm eur vandennad vugale a grie hag a hoarze en he hichenn; neuze en em gave heh-unan en he zi hag e kleve Gwendal o ouela er-mêz, a-drefiv an nor, med ne halle ket fiñval heh izili: « O ma Gwendalig, gortozit! Tonton Joz touchant, en eur zistrei euz ar chase, a zigoro deoh...» An nor a zigore ha Marjan mantret a wele Joz o tond tre, e fun endro d'e houg.

E fun! Be' vez atao eur fun, pa ne jom den na netra war an douar evid ho frealzi... Eur fun? Peleh em-eus lakaet fun ar vuoh? Touchant... warhoaz... mond d'ar hrignol...

Pa zavas ar goulou-deiz, e oa gourvezet Marjan, an derzienn war eun dro a domme hag a sklase anezi; he liñcheriou a oa trempet hag en dizurz endro dezi.

Soñjal a reas en he nozvez trubuillet, hag a skrijas. Ne ouie Petra d'ober. Peseurt hent heulia?

H. GAUDART

Deoh...da respont!

A benn gouzoud gwelloc'h Petra ema ol lennerien o hortoz digand **Brud Nevez** e room ar gomz dezo en niverenn-mañ.

Pedi a reom ahanoh da leunia ar pajennoù-mañ ha da zigas anezo endro da :

Brud Nevez
6, ru Beaumarchais
29 200 Brest

N'ho-peus nemed eun nebeud taoliou kreion da rei. Grit kement-mañ eta evel eur c'hoari, hag henn grit dioustu. Pa ne vo ken d'ober, ne jomo ket an traou da ruza. N'ho-peus nemed eur groaz da lakaad e-kichenn ar respont a zibabit!

Konta a reom war beb koumananter da respont : ar muja a respont-chou on-nevo, ar gwella a ze e vo, hag eur rekour a vo deom gouzoud gwelloc'h Petra d'ober. Evid kas ho respontchou, n'ho-peus nemed distaga ar peder follenn-greiz-mañ ha lakaad anezo dindan eur golo-lizer.

1. Paotr pe Blah

2. Ped vloaz ho-peus?
- nebeut evid 20 vloaz?
- euz 20 da 35 bloaz :
- euz 35 da 50 vloaz :
- euz 50 da 65 bloaz :
- ouspenn 65 bloaz :

3. O chom emao:
- e Breiz-Izel :
- e Breiz-Uhel :
- e diavêz Breiz :

4. O chom emao:
- en eur barrez diwar ar mêz (nebeut evid 2000 a dud) :
- en eur gêr vihan (euz 2000 da 10 000 a dud) :
- en eur gêr etre (etre 10 000 ha 100 000 a dud) :
- en eur gêr vraz (ouspenn 100 000 a dud) :

5. Peseurt micher ho-peus?

- labourer-douar :
- artizan pe goñversant :
- micherour :
- implijad :
- kelenner pe skolaer :
- mestr («cadre») :
- patron :
- micheriu all (pehini?) :

6. Hag oh brezoneger a-vihannig?

Pe ho-peus desket brezoneg?

7. Abaoe pegeid e lennit **Brud Nevez**?

- abaoe ar penn kenta toud :
- abaoe 5 bloaz :
- abaoe eun nebeud miziu :

8. Penaoz oh deuet da lenn **Brud Nevez** ha da goumananti dezi?

- kamaladou eo o-deus roet ar gelaouenn deoh da anaoud?
- lennet ho-peus **Brud Nevez** en eul levraoueg da genta :
- digemeret ho-peus bruderez :
- lennet ho-peus pennadou diwar **Brud Nevez** er hazetennou galleg :
- lennet ho-peus pennadou diwar he fenn war gazetennou brezoneg all :
- kavet ho-peus **B.N.** en eur helh sevenadurel pe en eur staj :
- en eur skol eo ho-peus gwelet **B.N.** evid ar wech kenta :

9. Petra a blij deoh e **Brud Nevez**?

- barzonegou :
- danevellou :
- kontadennoù koz :
- eñvorennoù :
- peziou-c'hoari :
- kanaouennoù :
- studiadennou diwar ar yez :
- studiadennou all :
- keleier sevenadurel :
- keleier diwar-benn ar stourm evid ar yez :
- keleier all :
- pennadoù-kaoz :
- rentaoù-kont leoriou, pladennoù, hag all...
- traou all :

10. Petra a blij deoh e **Brud Nevez**?

- ar skrivagnerien a skriv enni?
- eo eur gelaouenn « viziég »?
- ar stumm ma vez kinniget ar gelaouenn?
- ar pennadoù a gavit da lenn e-barz?
- traou all :

b

11. Petra ne blij ket deoh e **Brud Nevez**?

12. Daoust hag eo **Brud Nevez**

- êz a-walh da lenn
- re ziêz da lenn: (Displegit perag ma fell deoh)

- just evel m'eo sañset da veza

13. Petra a gont ar muia evidoh?

- lenn brezoneg :
- ar stil hag ar stumm-skriva :
- an danvez :

14. Hag e lavarit euz **Brud Nevez**

- ez eus tra-walh a bajennoù e-barz?
- n'eus ket tra-walh a bajennoù?

15. Euz priz ar houmanant da **Vrud Nevez**, e lavarit:

- eo mad evel m'ema
- eo re ger
- ez oh prest da bêa eun tamm kerroh evid kaoud muioh da lenn

16. Ha kaoud a ra deoh?

- eo digor a-walh **B.N.** war an amzer-vremañ
- e rankie beza digorroh
- Disklêriet penaoz, ma fell deoh :

17. Petra n'eus ket (pe n'eus ket a-walh) e **Brud Nevez** hag a garjeh kaoud (pe gaoud muioh):

- pennadoù kaoz:
- pennadoù a gazetennerez:
- poltrejou:
- enklaskou:
- pennadoù-istor:
- studiadennou (lavarit war betra):
- traou all:

c

18. Ha lenn a rit, ouspenn **Brud Nevez**:

- kazetennou pemdezieg e galleg;
- kazetennou sizunieg e galleg;
- eul leor galleg ar miz;
- eul leor galleg ar bloaz;
- leoriou e yezou all: (displegit peseurt yezou, ma fell deoh)

19. Ha lenn a rit kelaouennou brezoneg all:

- unan all :
- etre 2 ha 3 :
- muioh evid 3 :
- an oll gelaouennou brezoneg :
- hini all ebed :
- ar pennadoù brezoneg war ar hazetennou galleg :

20. Ha prena a rit leoriou (gwir leoriou evel just) brezoneg?

- hini ebed morse :
- unan ar bloaz :
- 2 pe 3 ar bloaz :
- an oll leoriou nevez :

21. Peseurt leoriou a brizit ar muia?

- barzonegou :
- danevellou :
- romançhou :
- peziou-c'hoari :
- istor :
- leoriou diwar-benn ar yez :
- envorennou :
- leoriou all: (lavarit peseurt, ma fell deoh)

22. En eur brena eul leor brezoneg, ha derhel a rit kont euz an doare-skriva?

- Ya, ober a ran.
- Ne ran ket.

23. Ha prest e vijeh da genlabourad da **Vrud Nevez**

- en eur skriva pennadoù e-barz:
- en eur zifazia an amrouennou:
- en eur rei an dorm d'ar mouller:
- en eur glask koumananterien all:
- en eur ober petra all:

24. Ma fell deoh lakaad hoh ano hag hoh adres, e hellit henn ober, med n'eo red nemed m'ho-peus respontet eun dra bennag d'ar goulen 23:

Ema ho respont da veza kaset da **Vrud Nevez**, 6, ru Beaumarchais e Brest.
Dioustu! Evid nompaz ankounac'haad!

Trugarez en a-raog!

d

Resit trist war sujed eur zoudard yaouank kondaonet d'ar maro en faoz pe An inosant dizoloet.

War eun ton trist.

Habitated Breiz-Izel, tostait da gleved,
Eun egzempl euz an trista zo nevez erruet
Gand eur zoudard maleuruz oa en permission
'Vond da weled e dud, kaer ha joaz e galon.

Eur pennad mad euz an hent en-devoa da ober,
A-raog ma hallje gweled e dad hag e vamm ger.
Ataket en kreiz an noz gand an deñvalijenn,
Eun ostaleri gavas ènni tu da antren.

Boñsoar en eur antreal, d'an dud, 'n-eus repetet,
« Ha me hallfe, mar plij ganeoh, beza lojet,
Rag an noz a zo teñval ha pell em-eus d'ober
'Raog ma hallfen 'n em renta en tal ma zud er gêr.

An ostiz, an ostizez, gand kalz demeuz a joa
A lavaras d'ar zoudard: « Tostet da ziskuiza,
Me 'ha d'ober-ho koan deoh, 'po ket pell da hortoz,
Ha goude 'n eur gwele mad kemerfet ho repoz. »

P'e-neus koaniet ar zoudard eo kaset d'e wele
E-barz ar henta estaj en eur gambr a-goste;
Hemañ oa diremors braz ha dijen e spered,
Gand ar skuizder, ar fatig, en em ro da gousked.

A-benn eur pennad goude oa kousket toud an dud,
Daou estrañjour 'n em gavas heb ober kalz a vrud,
Ha dre nerz eun diamant e trohont eur werenn
Ma tigorjont ar prenestr evid galloud antren.

Ar re-mañ oar an doare, en ostaleri-mañ,
E-barz en kambr an ostiz int savet da gentañ;
Ar re-mañ oa kousket-mad heb soñjal droug ebed;
An daou valeuruz infam warne zo bet saillet.

Heb galloud en em zivenn, na galloud 'n em zikour,
'Deus ranket soufr ar maro, digand tud treitour,
Rag gand eur gontell-boagnard 'deus bet o foagnardet:
An ostiz, an ostizez, raktal eo bet marvet.

Eur bugelig unneg miz a oa en e gavell;
Evel e dad hag e vamm a rank dond da vervel;
Rag gand ar gontell-boagnard ar bugel zo treuzet;
Da furchal ar meubl neuze ez int komañset.

Ar somm deuz a bemp kant livr gante zo bet kavet,
Hag ar vesellou kaerra o-deus ivez laeret,
Nemed en kambr ar zoudard 'devoa ket bet fouillet,
Ar pezh a zo penn-kaoz ma n'eo ket bet lahet.

Neuze eo bet partiet an daou griminel braz.
Ar zoudard pa zivunas 'vel dre spont a zavas.
O weled oa sklêr an deiz a-benn oa divunet,
Pa eo diskennet d'an traoñ, an ostiz 'n-eus galvet.

Mez kaer e-neus bet gervel, den ne ree van ebed,
Ma partias deuz an ti ha dijen e spered,
Rag pa en-devoa pêet toud ar pezh en-devoa bet,
En em lakaas en hent, en droug ne zoñje ket.

Mez daou zen a antreas o-devoa e weled;
gand an dud-mañ an ostiz, ivez, zo bet galvet
Evid dond da zervija deze beb a vanne.
Kaer o-deus bet o gervel, allaz! den na responte.

En-tal ar viñs 'deus gwelet ar gwad a-darchadou;
Raktal o-deus bet soñjet oa greet eno krimou.
Kerkent a zo galvet tud da zond da weled.
O! Doue! Pebez eston er gambr pa'z int antreet!

An ostiz, an ostizez, en o gwad gourvezet,
Hag eur bugelig bihan 'n o hichenn masakret.
« Eur zoudard zo partiet ahann 'vid ar beure,
Hennez eo ar maleüruz e-neus lahet ane.»

Neuze ar justis raktal eno zo bet kerhet,
Ha dre o urz ar zoudard a zo bet arestet
Ha digaset diraze 'vid dond d'iñteroji
War grimou zo ken terrubl greet gand eun den impi.

Ar zoudard e-neus laret e-noa eno lojet
Deuz ar beure partias evel ma oa savet.
« Heb soñjal en droug ebed, me a oa partiet
Rag ne oa ket em spered vije torfejou greet.»

'Zervij ket dezañ kontest, koupabl eo bet kavet,
Pa 'nevoa 'barz en o zi en noz-se sur lojet.
Kaset eo d'e rejimant evid beza barnet,
Gand daouzeg soudard yaouank, da veza fuzuillet.

Goulet 'n-eus permission da skriva eul lizer
Evid kas kelou d'e dud e rentet prizonier
ha da lavared dezo dond raktal d'e weled
'Vid ma hellje pokad de, a-raog kuitaad ar bed.

E dud 'vel m'o-deus klevet a zemplas gand glahar.
Gwelet pebez kalonad o-deus war an douar!
Kerkent 'vel m'o-deus gallet int zo en em rentet
Er prizon e leh ma oa o mab ker prizoniet.

« O! ma zad ha ma mamm ger,n'en em dezolet ket,
Rag ho pugel 'n hoh andred biskoaz 'n-eus bet manket.
Me a varvo inosant, ma horv 'h ay d'an douar,
Mez ma ene trioñfant vo lakeet 'barz ar gloar.

« Kenavo, ma zad, ma mamm, kenavo deoh a laran;
Pardon er memez amzer diganeoh a houlan;
Me a wel ar zoudarded gand fuzuilhou armet,
A-benn eur hardeur amañ, me a vo fuzuillet.»

'N em rentet ar zoudarded a gle e fuzuilla,
Ar zoudard mouchet gante ne ra nemed krena;
Dirag eur bobl vraz a dud gante oa digaset,
Mez e gabiten war varh oute 'n-eus bet kriet:

« Aretit! aretit pront, e bras zo amañ,
Inosant e tisklêriom ar zoudard vaillant-mañ.
An dud koupabl zo kavet deuz ar hrimou sañglant,
'Maint er prizon o hortoz momant o chatimant.

Ne hall den koñsideri ar joa, an evrusted
Oa en kalon an dud-mañ pa oa o mab delivret
Deuz tre daouarn ar zoudarded a glee e fuzuilla;
Pemp munut diwezatoh e oa greet dioutañ.

An daou vuntrer maleuruz p'o-deus bet gwelet
Oa eur zoudard inosant d'ar maro kondaonet,
O-deus bet 'n em zisklêriet a-zirag ar justis,
Ma oant dalhet er prizon da hortoz o suplis.

O hondaonasion zo da veza dibennet,
War blasenn vraz deuz kêr ar potañs zo dreset
Evid dond da bunisa daou griminal barbar
O-deus lakeet da grena an neñv hag an douar.

Tachom, ma mignoned, da heulia an hent mad
A zo merket evidom dirag on daoulagad.
Oll om sujet d'an trubuill, siwaz! barz ar bed-mañ;
Karom an eil hag egile, peoh deoh a zouetan.

Bet dastumet gand **Kerlann**.

Kalz brezonegerien n'anavezont ket

BRUD NEVEZ c'hoaz!

**Laouen e vijent sur da lenn brezoneg!
Kinnigit dezo BRUD NEVEZ!
Koumanantit anezo!**

YANN ar BURZUDOU

war e dorchenn

II

Koñchennou ha buhez ar zent.

Ma ne ree ket kalz koñchennerien ma bro gand danvez ar mojen-nou, moarvad e oa abalamour an darnvuia outo a zelle ouz ar gre-denn. Morhed o-doa da gemer diwarno. Greet he-doa an Iliz, a-hed ar hantvedou, he seiz posubl evid diwrizienna diouz an eñvoriou hag ar sperejou ar briz-kredennou paganeg. O veza ne helle ket dond a-benn outo, peurvuia, silet he-doa enno eun dalvoudegez kristen. Setu penaoz e oa bet lakeet an oll zouriou a ree ar pare din-dan paeroniez eur zant bennag. War eun dro, oll nerziou fall ar baganiez en em gave dastumet e dremm an Diaoul, lakeet brao a-walh da genderv deom, nemed trehet ha goapeet atao, da genta gand ar zent ma lavaran, da houde gand ar gouerien traken a oa penn-rolliou ar hoñchennou. Kement-se a ra da glevet penaoz Paolig a Gerzatan, Gwillou koz, ar Horneg, ar Paotr e Droad Faoutet a zigase aliez e fri er hoñchennou ar muia brudet evid beza paket berr beb tro. Gand ar zent, avad, e oa red azaouezi. Gwelloh veze kavet ober diouz al leor a gonte o buhez.

Al leor-ze en em gave rezet mad e kalz a dier. Beb abardaez-noz e tenned anezañ diouz e armel da lenn ennañ, a vouez uhel, buhez sant an devez d'ar familh vodet. Se a ree teir pe beder bajenn vur-zuduz gand reflexionou profitabl war o lerh a-raog mond da gousked. D'ar veleien ha d'ar brezegegerien e plije kemer ennañ o skweriou mad, pezh ne vanke ket da startaad e levezon. Kavoud a reed ennañ dreist-oll istor sent ar barrez hag ar parreziou tro-war-dro e leh ma'z ee an dud da bardonia. Eun niver a chapelidi hag eur bobl a zelwennou a ree danvez, dre ar vro, d'ar Vojenn Aour-ze. Dis-kouezet e veze ivez, gand pebez doujañs en amzer-ze, eun tamm

euz ar vag vên he-doa talvezet d'an aotrou Sant Vio evid treuzi ar mor ha dond da zigas an Aviel d'on hendadou. Distrei a reas tramor an hanter all euz ar vag. A-walh da rei da glevet e oa Buhez ar Zent eun dalh miret ma ne grede ar goñchennerien mond dezañ nemed war evez, aon da goueza en dizoujañs en eur gemma tra pe dra dre nerz eun ijin entanet. Gouzoud mad a reent piou oant. Hag ouspenn pez a zo skrivet a zo skrivet. Ne heller ket touch outañ. Amparfal a-walh on bet-me eur wech evid diskouez d'eur hoñchenner eul leor m'en em gave ennañ eur vojenn kontet gand an den war eun doare ouz e benn, kalz frankoh eged hini an dastumer, evel ma c'hoarvez aliez. Biskoaz ne fellas dezañ ober mui gand an danvez-se. Beb tro pa veze goulennet digantañ e responte, rehuz an tamm outañ: « Lakeet eo bet dija war ar paper.»

E-kichenn Buhez ar Zent e veze kavet moulet koñchennoù deread ha relijiuz evid skwer-vad an dud. Tenna ree lod outo ouz roll boazet ar veleien o kelenn ar hatekiz pe hini prezegeerien ar misionou. Lod all e oa outo koñchennoù a veze klevet er beilladegou, nemed adaozet peurvuia gand tud a iliz evid dezo talvezoud da gentel evid ar zelaouerien. Euz ar re-ze oa dastumadenn an abad Kristov Jezegou, **E Korn an oaled**, bet lennet kalz ha drevezet aliez em bro etre an diou vrezel. E diwez peb koñchenn, e yez plên evel just, eun nebeud gwerzennou groñs a verke deoh en eñvor reolenn-veva eur Yann ar Feunteun katolik, abostolel ha roman. Hogen, digouezet eo bet ganin klevet eun eil-doare bennag euz istoriou **E Korn an Oaled** war deod koñchennerien a-ziwar ar mêz a-raog d'al leor beza moulet. Bez' e hellan, eta, dougen testeni e-neus lamet kuit piz an abad mad peb tra a helle tremen da loustoni. Soñjal a ran a-ratoz er roll c'hoarriet gand ar baill-kaoh. An traou-ze, avad, ne oant ket louz evid koñchennerien ar vro na kennebeud o zelaouerien, boazet ma oant da gomz ken brao ha tra euz dilerhiou ar boued diazezet. Goude ar brezel 14, gand skoazell an iliz hag ar skol, e stagas al lavar a-henou-da-henou da goll e zaour, ne baouezas ket ar sevender nevez da hounid warnañ. Dond a reas aour goue ar hoñchennoù da veza eur hendeuzadur spletuz, **ad usum delphini**. Setu aze ar priz-daspren lakeet d'ar skritur.

Frankiz ar goñchenn

Ma leze koñchennerien ar Vro-Vigoudenn gand an dud a iliz an dever da gelenn dre ar goñchenn, se n'eo ket da lavared ne ouient ket talvoudegez houmañ. Ne gredan ket mond re bell en eur zivenn e oa lakeet d'ar goñchennerien, er penn kenta euz ar hantved c'hoaz ha gand aotre mud ar hevredadou kouerien, eur garg dibar ma oa anzavet dezo ar galloud ha zoken ar gwir-dreist outi. Bez' e oa koñchennerien e-giz ma oa rabouterien, ar re-ze o veza donezonet ken diarvar hag ar re-mañ. Anez santoud ennañ an donezon-ze, den n'e-nije kredet mond da barea pe da goñchenna. A-hend-all, evel m'en em gave ar rabouterien er-mêz deuz ar vedisinerez, evel-se ar goñchennerien en em gave er-mêz deuz ar gredenn, pez ne ra ket da glevet e oant a-eneb dezi. Hogen, kavet 'm-eus aliezig beleien parrezioù a oa war ziwall, kalz pe nebeud, e-keñver koñchennerien ar vro. Dreist-oll eun denig mad a berson a lakeas ahanon stard war evez ouz e zakrist dezan. Moarvad e vo tamallet din tenna kont re vuan. Bez' ez eus leh, avad, d'en em houlen hag-eñ ne dremenas ket gwechall ar hoñchenner da hêr eur seurt paganiez, evel ma tremene ar rabouter da veza enaouet gand an diaoul, or henderv daonet. Pell a-walh goude ar Grenn-Amzer ez eus bet devet pareourien brudet da veza sorserien hag ar mestr Frañsez Rabez, ar hoñchenner dreist, e oe darbet dezañ ivez trei da voged. Danevellou koz ha n'int ket koñchennoù.

E gwir, ar goñchennerien a ouenn vad e oa outo paotred temzet a-walh da glask abegou, zoken pa grede dezo beza traken kaserien mojennoù deuet dizroug kaer dre forz beza malet ha divalet. Peb koñchenn, feiz, ez eus outi eun doare d'en em zivaha. Ar furra outo a ziskouez eur pleg d'ar frankiz. E vestr e-unan eo ar hoñchenner keit ha ma pad ar goñchenn, da houde e tistro d'e stad a baourkêz den. Anavezet 'm-eus unan bennag hag a droe brao da flemma ja oent da vad ganti, ha padal e oant izel hag aonig er vuhez pemdezieg. Kement-se abalamour o-doa fiziañs er goñchenn a daole anezo er-mêz diouto pe a oa, gwelloc'h c'hoaz, eun dra diavêz. Ken ne glaskent ket, a-raog echui, tenna an disterra kentel diwar an istor. Eur goñchenn distaget mad a zo gouest d'ober he roud er sperejou heb goulenn da veza diskleriet. Eur hreunenn taolet kuit 'ni eo hag a ra gwrizioù hervez an tamm douar ma kouez warnañ. Hada ra ar hoñchenner. A-walh evitañ m'eo mad ha druz e hadenn. Ne ra ket forz da zastum east.

Dres abalamour d'he frankiz e sell ar goñchenn ouz an oll. N'eo ket gwir ez eus koñchennou-pobl evid ar vugale, lod all evid ar re vraz. Ma vije bet gwir e vije ranket kaoud outo ivez evid ar re binvidig, ar re baour, ar vistri, ar vevelien, ar re glañv gand ar seiz pehed marvel. Ar memez istor a dalveze da voued d'an oll, pep hini a ziveske e lodenn dre ma yee an traou ganti, a bake a-wechou e stal diwar vond. Ne oa ket feuket ar re vraz gand ar frazennoù o charrea en o homzou hanter-vouzar koulz o c'hoantegeziou kuz-kuz hag o luhadennoù mez, dinehet ma oant gand doareoù tud ar roll, heñvel penn-da-benn ouz o re, o fatromou e berr, heb skoulm da ziluzia. Deski a ree ar vugale penaoz e ranked en em henchañ en eur zelaou an iskiz a gatekiz digouezioù e leh ma c'hoarveze bravig ar burzudou heb deoh kaoud nikun ebed da drugarekaad, e leh ma ne oa nehet nikun gand ar homzou ne ouie ket diouto, ha padal e oa gand lod euz ar re glevet en iliz, domani brezoneg ar zul, uhel an tamm outañ ha da zouja, latin anezañ a-wechou. Echu ar goñchenn, ne jome war he lersh nemed ar c'hoant da vond d'he diazeza er gwele-kloz, pep hini evid e gont hag heb emzellad ebed.

A-dreuz ar parkeier noaz ha dindan al loar yen pe o navidial e bouilenn an henchou don gwaskedet ouz ar barradou, ar hoñchennner a oa dija war vale da zistrei d'ar gêr. Hag a-wechou e kendalhe da gonta evid e vab bihan, stlejet gantañ ouz an dorn war e lersh hag o streboti er roudou-kirri, hanter-gousket hag eur hard ouspenn. Konta ree dreist-oll evid al laboused-noz, evid Paotr e Veh Lann a zo o chom el loar, evid an avel o ploma ar homzou eun-hag-eun pe tri-ha-tri da heul e du. Ar mab bihan, me 'ni oa.

Keloioù euz ar boutaouer

E miz eost diweza on kejet gand eun den koz deuz Plozeved e-neus anavezet ma zad-koz ar boutaouer da vare e vrasa brud koñchennner. Eun digouez kaer evidon. O klevet anezañ, eun dra vunud bennag eet diwar ma zoñj a zo savet war horre e-giz an dizien war al lêz. Lod all he ne ouien ket outo a zo deuet da startaad em eñvor eur penn-den a dalvezas din boemerez ma bloaveziou kenta. Desket 'm-eus ivez, eur gaouad vez evidon, ne houzañven ket klevet ma zad-koz o tibuna evid an oll Koñchenn **Teir Merh an Diaoul**. Honnez a oa din-me ma-unan. Ar re all, avad, o-doa c'hoant ivez outi. Ha goulenn anezi groñs hag uhel. Neuze ar boutaouer a droe ouzon

en eur dremen e zorn war vleo e chod hag a lavare: « Mar plij gand ma mab-bihan ». Me ne oan ket gouest da lavared nann dre ma oan bet savet mad gand ma mamm. Nemed em-boa droug-kalon, hervez doare. Evid kas an droug-ze kuit, bez' e veze atao eun bennag, er zaliad, hag en em lakee da beilla din brava kistin ar jidouarn. « Eul louarn bihan e oa ouzoh » e-neus lavaret din paotr koz Plozeved. Ha c'hoarzedeg ganeom.

Ma zad-koz a stage da gonta da viz gwengolo, d'ar mare ma tas-tumed an avalou-douar. En amzer-ze, al labourerien-douar en em skoazelle kenetrezo evid ar gwasa kasadennoù, dreist-oll an eost. Zoken ar re n'o-doa park ebed dezo a gase eun bennag euz o ziad da rei eun taol dorn. Biskoaz n'em-eus klevet den ebed o klemm euz an dlead boazet-se, med bravoh c'hoaz, ar paourra etrezom a vije bet mezekaet ma ne vije ket bet goulennet digantañ rei eun devez bennag da binvidikoh egetañ. Ouspenn-ze, gouzoud mad a reed e « rente » atao an dleour mod-pe-vod. Ne veze ket ezomm da zevel kontchou. Erfin, ken tenn ha ma veze an deveziou braz-se evid an oll, bez' e veze ar blijadur d'en em gavoud bodet er memez park, da farsal, da droka ar heloioù nevez heb ehana da ziskouez kalon d'al labour. Hag e veze ivez ar pred boutin pa veze bet dis-karget ar zahad diweza er hrignol pe er harri.

Euz ar foenn beteg an avalou-douar dre an eost gwenn hag an ed-du, ar boutaouer ne fazie war hini ebed euz an deveziou-ze en e garter. Ne gave ket e bar da zudia ar gompagnunez e doare pe zoare, dreist-oll en eur ober gand e deod a oa bet distagellet mad dezañ. Bommou c'hoarz ha youhadennou skiltr ar merhed a ziskoueze a-walh e pe korn euz ar park e oa an ibil-ze ganti. Nemed e ouied ivez e veze war e wella tu eur wech deuet ar mare da zibaba an avalou-douar d'o lakaad er zeier. Neuze e kemme an ton gantañ. Ne veze ket mui bourdou lemm nag ijinou dre gomz. Penndaoulinet war an douar gwag, heb herzel eun disterra gand e labour, staga ree da gonta kaoziou didermen a gave en e benn en eur vond. Ne veze ket outo koñchennou rik, ne lavaran ket patromou tud iskiz ma toue beza anavezet anezo ha padal e veze o paouez rei buhez dezo war an taol, krennlavariou rimet diwar zav ha war an tomm, ma tisplege ar wrizienn outo en eur hervel an istor, danevelligou lakeet gantañ war gont eun bennag a oa aze hag a grede, war an diwez, e oa c'hoarvezet an traou-ze, ken spis e oa an darvoudou. An dud vad o selaou outañ a zizoñje diouz an droug-dargreiz evid gouzañv an droug-bouzellou dre forz padoud heb dirolla da hoarzin.

Bez' e veze atao kalz bugale er parkeier avalou-douar. Labourad a reent koulz hag o herent da zastum ha da zibaba. Hogen, pa goueze an abardaez, e vezent kavet bodet oll endro d'ar boutaouer. Kaer

blejal warno d'o digas d'al leh merket dezo, netra d'ober. Sabatuet oent. Ar harr diweza, karget pounner, a guitee ar park e-kreiz storlok e ahel, war e lerh ar wazed hag ar merhed, troet da hlaz gand ar bouldrenn hag ar skuizder. Neuze ar boutaouer en em denne ouz eur hleuz, ar vugale endro dezañ: « A walh a zotoniou 'm-eus taolet er-mêz hirio. Bremañ emon o vond da gonta deoh traou a-bouez hag a zo ken gwir hag ar Hredo pe dost ». Hag e konte dezo « Penaoz e teuas eur Breizad da veza Roue Bro-Zaoz ».

Setu pezh em-eus klevet digand eun den koz deuz Plozeved, e miz eost ar bloavezh-mañ. Lavaret e-nije kalz muioc'h diwar-benn ma zad-koz. Nemed e oa redadeg veloioù em farrez. Ha deuet e oa an hini koz da weled ar rederien. Gwelet e-neus anezho.

Per Jakez HELIAS.

Kavet e vo ar skrid galleg e-barz Les autres et les miens.

Ha lennet ho-peus
oil beziou-c'hoari
Per Jakez Helias?

Mevel ar Gosker : 15 lur; 150g.

Tan ha ludu (Marheg an nevez-amzer; An douger-tan; Maro bihan Tin ar Halvez; Egile) : 15 lur; 150g.

An Isild a-heul : 30 lur; 350g.

Piou e-neus lazet an hini koz? : 8 lur; 40g.

Eun ti divestr; Pôtr ar henteliou; Kov Gwillou Vihan a ra trouz; Piou a bêo?; Eur yar kaled-mên : 10 lur; 90g.

War eun dachenn fobal; Eun den divemor : 5 lur; 90g.

Eur chupenn marhad-mad; Bouzar pe vud?; Ar boued touseg : 10 lur; 95g.

Pladennoù

Biniou an Northumberland gand THE CUT AND DRY BAND.

Setu an eil bladenn da veza greet gand maill-sonerien war biniou an Northumberland (e hanternoz Bro-Zaoz), ha ne zonont ket asamblez peurvuia. War ar bladenn genta, ne zonont nemed war stumm kosa o biniou, da lared eo eur biniou gand eul levriad heb alhwez, ha ne helle son nemed eiz notenn (stumm an 18ved kantved). War homañ avad, e klevet toniou sonet war levriadoù gand alhweziou warno, hag a hell son 26 notenn, gand an hanter-doniou.

Euz lodenn ziweza ar 17ved kantved eo ar hosa biniou euz an Northumberland a zo bet kavet. N'eo ket chomet heñvel abaoe ar mare-ze, med an doare da lakaad ar benveg da zon a zo chomet ar memez hini memestra. Da lavared eo e vez digaset an êr 'barz ar zah deuz eur souffletez staget ouz ilin ar zoner: abalamour d'an dra-ze e chom seh an afichennou, hag e padont kalz pelloh. Grêt eo evid beza implijet e-diabarz an tier.

Stanket eo al levriad en e benn (ar pezh ne zigouez nemed er biniou-ze, hag er « musette », eur benveg hag a zo kar-dezañ). Setu ne vez savet nemed eur biz beb taol, ar pezh ne heller ket ober war ar biniawou all.

Pevar gorn-boud e-neus, med ne vez nemed tri o son er memez amzer. Peder notenn a hell rei peb korn-boud, da lared eo e hell beza akordet e pevar don disheñvel.

Gand ar « musette », hag a veze sonet e lez Rouaned Vro-Hall, er seitegved kantved, eo ar biniou-mañ an hini savet en doare ar gouezieka toud er bed a-bez.

Ha koulskoude, abaoe penn kenta an 19ved kantved, zo bet lakeet alhweziou war al levriad, seiz peurvuia, med beteg seiteg a-wechou. Setu ez eus bet tu da zon n'eus forz peseurt ton war ar benveg-ze: 26 notenn, toniou hag hanter-doniou memez mod, da lared eo diou eiz-vedenn, gand eur skeul kromatig, a-drugarez d'an alhweziou nemetken.

Er penn kenta e oa an oll levriadoù e « fa », med savet zo bet re e « sol », hag e « do » nevez 'zo. Abalamour da ze eo kalz êsoh dezo son war eun dro gand binvi-sonerez all, evel ar piano, ar violoñs pe ar fleüt. Tri deuz sonerien ar Cut and Dry band, war ar bladenn-mañ, ne zonont bremañ nemed war levriadoù e « sol » abalamour eo sklêroh o zon.

Pemp soner (pevar baotr hag eur plah) a glever war ar bladenn-mañ; oll e sonont ouz biniou an Northumberland; med pevar a zon ouz eur benveg all ouspenn, ar violoñs hag ar viola, ar piano, ar fleüt-houarn a-dreuz, hag ar « honsertina », eun espez-arkordeoñs bihan. Med c'hweh dez an toniou (diwar bevarzeg) a zo sonet war biniou an Northumberland, heb benveg all ebet da heul: 'barz an toniou-ze e vez prizet ar muia son dispar ar biniou-ze.

War ar bladenn ez eus toniou dez hanternoz Bro-Zaoz evel **Sir Sidney Smith's March** pe **Nae gud luck about the Hoose**. Sonet e vezont gand adstummou bet savet espres-kaer evid ar biniou-ze war-lerh: diêz-tre e seblant beza an adstummou-ze, ha koulskoude int sonet brao-tre.

Daou don skoseg a glever c'hoaz war ar bladenn, eun ton-vals: **Mrs Elder**, ha **The Eats Neuk of Fife**. N'eo ket pell tamm ebet Bro-Skos dez an Northumberland, gwir eo.

Nevez savet eo an oll doniou all, pe espres-kaer evid ar biniou, pe kempennet evid beza sonet outañ, evel an daou don **Jim Hall's Fancy** ha **The Barrington Hornpipe**. Red eo beza eur mail-zoner evid dond a-benn da zon an hini kenta euz an daou don diweza-mañ, ken buan, hag en eun doare disi. Startijenn a-leiz a zo en eil ton, sonet ma'z eo ouz pemp benveg disheñvel asamblez.

Mar deo talvouduz ar bladenn-mañ, eo abalamour eo brao-eston son biniou an Northumberland, unan euz ar re soutilla er bed a-bez. Hag ivez abalamour e kiever anezañ gand pemp mestr-soner, ha n'o-deus ket bet aon da joaz ar plijusa hag an diêsa toniou a hell beza sonet ouz ar benveg-ze.

J. Goyat.

Anoiou-tiegezh Breiz-Uhel

Notenn

Erratum: Brud Nevez, niv. 51, pajenn 26, Anoiou-tiegezh euz Breiz-Izel e Kêr-Naoned, lenn: **Lod all o-deus eur stumm galleg (Rousseau, marchand...); unan bennag n'eo na brezoneg na galleg (Dejaegher, Libera...)**

Lakaad ouspenn:

An 2500 ano meneget er pennad a zo douget gand eur boblañs a 17 590 a dud. E Sant-Nazer, St-Sebastian, Stez-Luz, Orvault, Thouré, ar Groazig, war-dro eun drederenn euz an dud a zoug anoiou a gaver war roll Gourvil pe anoiou ha n'emaint ket war ar roll-ze, med a zo ken « breiz-itelad » hag int.

Da skwer, er Groazig, e kaver 315 ano douget gand 528 a dud war 1 345 ano e leor an telefon.

K. RIOU

Leoriou

Eur romant-polis war an amzer-dremenet.

Ema priz ar **Huzul Etrevroadel evid Kendalh ar Brezoneg** o paouez beza roet da **Jakez Konan** evid e leor kontadennoù ha danevellou **Lannevern e kañv**. Tro am-eus bet da lavared eun tamm mad a vad euz al leor-ze d'ar houlz ma oa deuet er-mêz (1), hag ar re n'o-deus ket lennet anezañ c'hoaz o-deus bremañ eun digarez brao d'henn ober pa 'h eo bet priziet.

Setu avad ma teu er-mêz er memez amzer eul leor all gand Jakez Konan: **Ur marc'hadour a Vontroulez** (2). Eur romant berr eo hemañ, hag a gont justamant trubuilhoù eur marhadour euz e vicher, eet euz Montroulez da Lanuon d'ober aferioù. En 18^{ved} kantved eo e tremen an istor, ha d'ar poent-ze, eh ee ar varhadourien war varh. D'ar houlz-se ivez e veze laeron vraz en noz war vord an heñchou. Hag evel just, e teu laeron da goueza war chouk ar marhadour... Ne gontin ket an istor amañ, evel just, pe neuze ne dalvezje ket ar boan deoh lenn anezañ. Ar pezh ho-peus da houzaod eo ivez eun istor a garantez, ouspenn beza unan a noblañsoù hag a laeron vraz.

Med evidon-me, on bet hegaset gand an ardou ne baouez ket d'ober an duchentiled mañ an eil e-kefiver egile. Arabad ankounahaad e tremen an istor a-raog an Dispah. Hag etre noblañsoù emañ amañ, hag o doareoù, ha n'eo ket re an dud all, eo a zo taolennet. Diwar-ze, e vijen troet da lavared n'on-eus ket ezomm ken a istorioù koz a 200 vloaz 'zo, ha kalz gwelloc'h e kavan an istorioù a-vremañ a skriv a-hend-all Jakez Konan (**Eur beurevez kaer a viz ebrel**).

Ha koulskoude, n'eo tamm ebet displejuz **Ur marc'hadour a Vontroulez** da lenn. Eur wech krog el leor, eh eer betek ar penn. Sklêr eo e oar J. Konan petra eo skriva, ha petra eo skriva e brezoneg, ha skriva mad a ra. Ouspenn-ze, e-neus kavet an tu da lakaad eun tamm mad a « suspense » en e zanevell. A-wechou, evelkent, e weler anezañ o tond a-bell eun tamm bihan, dreist-oll war ar fin.

Med eur seurt romant-polis eo a-benn ar fin an istor, unan a-zoare memez, hag a lenner heb damanti. Kerse eo ganin nemetken e vije ar romant-polis-se unan war an amzer dremenet, en eur bed tremenet, ha n'eo ket unan euz an amzer-vremañ.

F. B.

- (1) *Brud Nevez*, niv. 42.
(2) Bet embannet gant *Al Liamm*.

AR HELAOUENNOU

Komzom bremañ euz eun nebeud kelaouennoù hag o-deus laket da zond er-mêz eun niverenn a-bez war eun danvez hepken.

Studi ar rannyezou.

E 1974 an hini a grogas *Jean Le Dû* hag *Yves Le Berre*, euz *Kevrenn Geltieg Skol-Veur Vrest*, da lakaad ar gelaouenn *Studi* da zond er-mêz, gand skoazell *C.R.D.P. Akademie Roazon*. Ema *Studi* oh embann he 20ved niverenn. Moarvad n'eus ket bet embannet abaoe 7 vloaz kement a niverennoù ha ma oa bet soñjet. Adlavared a ranker a-hend-all n'eus ket bet greet kalz a strivou da gaoud eur bravoh golo na da jefich anezañ euz eun eil niverenn d'eben. Ar pezh a zo a-bouez eo an danvez a zo bet kinniget abaoe d'ar gelennerien m'eo bet savet *Studi* evito koulz ha d'he lennerien all : testennoù ha pennadoù-studi evid ar skoliou, ar penn kenta euz eur geriadur nevez, daou leor diwar-benn ar hembraeg, eur studi diwar-benn an anoioù-leh.

Gand *Bernard Tanguy*, ijinour er *C.N.R.S.*, an hini oa bet savet al labour diweza-mañ. Estreged hennez e-neus kaset da benn, peogwir e-neus divennet eun dezenn diwar-benn anoioù-leh Breiz-Uhel hag e-neus embannet a-hend-all eul leor (ha ne oa ket bet plijet d'an oll) diwar-benn *La Villemarqué* hag ar vroadelourien e Breiz, en 19ved kantved.

Efi eo ivez oberour 20ved niverenn *Studi* (1). Ar wech-mañ eo war-zu ar rannyezou eo en em droet, ha sañset n'eo ar haier-mañ nemed an hini kenta euz eur rummad a hweh hag a dle rei deom an tu da denna toud ar gonid a zo posubl euz

Atlas ar brezoneg Per ar Rouz (2). *Gwir* eo, n'eo ket hemañ êz d'implijouñ bepred evid ar re n'int ket barreg war ar yezoniezh. Setu, m'on-eus komprenet mad, ema *B. Tanguy* o vond da ginnig deom studiou war heriou ha war gartennou an *Atlas*, hag a dleje beza prisiuz.

Eun tamm keuz on-eus gand se n'e-nije ket displeget en eur raglavar bennag azaleg ar henta kaier-mañ na petra just oa o vond d'ober na penaoz eo en em gemeret. Talvouduz e vo kavet avad an 20 pajennad kenta, dre ma roont eun daolenn sklêr euz ar pouezusa geriaduriou euz ar brezoneg abaoe ar Hatolikon.

Hetom e teuje buan er-mêz ar 5 kaier all euz studiadenn *Bernard Tanguy* : gand mall e vint lennet gand kement hini a zo troet gand rannyezou ar brezoneg.

Anjela Duval.

Eun nebeud devezioù nemetken goude he maro, e rente *Brud Nevez* enr da *Anjela Duval*, dre bennadoù savet gand *Naig Rozmor*, *Per-Mari Mevel*, *Fañch Danno*. N'eus ket kalz a gazetennou ha n'o-deus ket gouestlet da vihanna eur pennad da varzez *Traou-an-Dour* : n'eus den hag a vije dizeblant.

Ema d'he zro ar gelaouenn *Al Liamm* oh embann he 210ved niverenn, penn-da-benn diwar *Anjela Duval* ivez (3). testenioù a-berz tud hag o-deus bet darempredet anezhi kalz eo ah a d'ober danvez 80 pajenn an niverenn. Danevelli a ra *Ivona Martin* penaoz eo deuet *A. Duval* tamm ha tamm da lenn ha da skriva brezoneg. Poeuz a ra an *ao. Klerg* war ar « halvar » he-deus bevet, o tigemer bemdeiz pro-sesionadoù tud hag a deue da « laerez » dezi heh amzer : ouspenn 250 e teir-zizun, e penn kenta 1971, hervez ar pezh a skriv heh-unan en eul lizer. Tregeriadez diwar ar mêz ma oa, e kave d'*Anjela* e oa eun dever dezi reseo en he zi evel m'eo dleet hervez ar hiz.

Skriva a ra diouz e du *Yann Talbot* e oa *A. Duval* « stag ouz eur bed hengounel ha mêziadel. Eviti, Breiz a oa Breiz ar mêziou, Breiz an douar, Breiz al loened. Breiz ar hêriou, Breiz ar bed modern n'anaveze ket. Ar *Vreiz* a oa da zavetei a oa eviti hini ar mêziou, hini ar spered.» Soñjal a ra dezañ eo ar varzez « an hekleo diweza en ol lennegezh vroadel euz eur zevenadur kristen ha mêziadel a zo o vond da get, a zo eet da get endeo marteze.» (4)

Barzonegou gand *Maria Prat* ha *Roparz Broudig*, hag eun nebeud skridoù diwar he dom a gaver c'hoaz en niverenn-mañ. Med n'eus ket, siwaz, eur roll euz heh oberou.

Kantikou

A-dra-zur eo eur pezh labour a studi e-neus savet **F. Kervella** diwar-benn **An den etre an anken hag an ankou, etre an neñv hag an ifern** (5), ma pourmen ahanom a-dreuz eun toullad kantikou brezoneg. Ha koulskoude, e chomer a-walh war e naon.

Rag, daoust d'an talbenn a zo bet laket d'al leor, n'eo ket kement-se eur studi war danvez ar hantikou (ar spered anezo, ar menozioù displeget enno, ar hentelioù a zo klozet enno...) e-neus savet an ao. Kervella. Peurliesia eo chomet war dachenn ar yezh ha war hini ar « gaerder » pe ar « gened ». Ar pezh e-neus greet eo klask evid kantikou 'zo (hini ar **Baradoz**, hini ar **Purgator**...) an testennoù disheñvel anezo, keñveria an eil hag eben euz an testennoù-ze, ha disklêria peseurt gwerzennoù, hervez e zantimant, eo ar re gaerra, e peseurt kantik e tisleger ar braoa an traou...

Diskouez a ra ervad F. Kervella da nbeuta e hell beza kalzig a ziforh etre eun eil testenn hag eben (gweled e bennad digori ha p. 99 da skwer). Er hantikou brudeta zoken, n'eo ket diazezet ken mad-ze ar gerioù nag ar gwerzennoù (hag an tonioù? ar re-mañ ne lar netra anezo). Ha kalz a gemmoù a zo, da skwer, e koublad kenta **Kantik ar Baradoz** hervez an eskoptioù, hag all...

Iskiz eo avad eo bremañ, pa ne glever ket kana ken nemeur ar hantikou brezoneg en ilizou, en em lakaer da zevel studiadennoù diwar o fenn.

Jakez SALAUN

(1) **Bernrad Tanguy** : Dialectologie bretonne. Analyse lexicographique et cartographique de l'Atlas Linguistique de la Basse-Bretagne de Pierre Le Roux. Studi, CRDP de l'Académie de Rennes, 92, rue d'Antrain, Rennes.

(2) Kaoud a reer a-nevez oll gaierou an « Atlas » da brena digand : Editions Armoricales, 10, av. du gal De Gaulle, Bourg-Blanc, 29212, Plabenneg pe war-eeun digand Brud Nevez.

(3) **Al Liamm**, 2 venelle Poulbriquen, 29 200, Brest.

(4) Doare-skriva ar Skol-Veur ganeom.

(5) **Hor Yezh**, 1, plasenn C. Péguy, Lezneven.

